



LOUARZIG


Niv. 12



Guatemala



Skol an Diaoul



Leonardo da Vinci



Pa zeu an hañv en em laka ar grilhed-gwez da ganañ. En-dro d'ar mor Kreizdouar e plij ar sonerezh-se d'an dud pa leugn ar c'hoadoù-pin. Pevar bloaz a vo bet ret gortoz ken na vo aet ar grilh-gwez da ganer.

Ar grilh-gwez

Bevañ o kanañ

ENorz-Amerika zo ur spesad grilhed-gwez a dremen e viskoul 17 vloaz en douar. Du-mañ, ne vev ar biskoul nemet 4 bloaz. Kofadoù a reont gant ar sabr a lonkont diouzh gwrizioù ar gwez. Neuze, un devezh nevezamzer, e miz Mae, e teu ar viskoulenn er-maez eus an douar. Ur c'hef pe ur skourr a glask kerkent, evit en em lakaat e pign outañ ha kregiñ d'en em dreuzfurmiñ. Diouzh an noz e c'hoarvez ar vetamorfozenn : drailhañ a ra al loen e c'holoenn da lezel e benn da zont er-maez, ha displegañ e eskell... Ur verr a vuhez en oad-gour a grog evit ar grilh-gwez.

Ne bad an dreuzfurmidigezh nemet 30 munutenn. Kaletet e vo an eskell blot gant heol ar beure.

Ar grilh-gwez hag ar verienenn

E-barzh mojenn Jean De La Fontaine ez a ar grilh-gwez da c'houlenn pourveziou-boued digant ar verienenn. Ur brav a istor eo met disheñvel eo diouzh ar wirionez peogwir ne vev ket ar grilhed-gwez pelloc'h eget an hañv !



Liv ar rusk

Ret eo kaout daoulagad lemm-lemm a-benn gwelet ur grilh-gwez. Aes kompren perak. Heñvel eo e liv ouzh rusk ar gwez o-unan.

Emheñveladur a vez graet eus ar perzh-se.



Ar par an hini a gan

Evit dedennañ ar parezed e kan ar par. Ur groc'henenn voan, stign war ur seurt kased-dassoniñ, a lak da zaskrenañ gant e gigennoù-kof.

Un hañvezh

Delc'her a ra ar grilh-gwez d'en em vagañ gant sabr ar gwez dre doullañ o rusk. Ha lakaat a ra e holl nerzh gant ar gouennañ rak ne chom ket kalz amzer gantañ da vevañ ken. Nijal a ra kuit evit klask ur c'henseurt pe ur genseurtez.

Dozviñ a ra ar barez he vioù e-barzh garennoù plantoù zo. Evel-se e c'hellint sankañ e-barzh an douar ha stagañ d'o zro gant kelc'h ar vuhez. E-kerzh an hañv ne raio ar grilh-gwez en e oad-gour nemet gouennañ.

E dibenn an hañv, e miz gwengolo, e varvo.

